

## KANTIK SANT MAUDE

-I-

O va Doue benniget, me a c'houlen ho krass  
 Evit m'hellin meuli-kaer d'an holl bihan ha bras  
 Ar vertuziou burzudus a heuilhas Sant Vaude  
 Ma Kavimp skouer ha kentel e histor he vuhe

Diskan

O sant Vaude benniget; aenoromp hirio  
 Ni ho ped gant Karante, Klevit hor goulenncou  
 Ra resevo diganoc'h hoc'h holl bardonnerien  
 Ar grassou hervez Doue a zeuont da c'houlen.

-II-

Euz an Irland ginidic, mab d'eur roue doujet,  
 Hen en doa war an douar peb enor ha respet;  
 Mes holl jaaiou ar bed-man d'he galon voa dister,  
 Dinec'h braz ho tilezas 'vit heuilha hor Zalver.

-III-

Maude voa ar yaouanka euz a zek krouadur,  
 Deski a reas abred beza eur bugel fur;  
 Evel ma oa vertuzuz ha gant an holl karet  
 Eun dimezienorabl vca d'ezan kinniget.

-IV-

Ar re vrás ha galloudus euz ar rouantelez  
 A glask deseo ar zant gant peb seurt madelez;  
 Mes poan gollet voa d'ezo klask gounit he spered  
 Rak e sonj ar prins yaouank ne voa ket chom er bed.

-V-

Plijaduriou ar bed-man ne gavont ket a blas  
 E kalon eneou pur nag e vent prinsed braz;  
 Hor zant c'houlas gant Doue dre aoun da vea trec'het  
 E teuche kenta-gwella en e gorf eur c'henvet.

-VI-

Euz e beden birvidik Doue a chilaouaz  
 Hag eun drouk euzuz meurbet d'ezan a zigassas;  
 Heb dale dre an drouk-ze voa kollet he c'hened  
 Ha neuze d'hen domezi ne voa mui sonj ebet.

-VII-

Lezet libr gant he gerent en em ro d'ar studi,  
 Arog pelle'zeu adarre re-bar da bep-hini;  
 Goude ma voa gret beleg e kuiteas he stado  
 Treuzi a reaz ar mor evit dont en hor bro.

-VIII-

He vagig a zouaras e Eskopti Treger,  
 Sant Tudal eno Eskop her gra missioner:  
 Neuze da brezeg ar feiz e ieas dre ar vro.  
 'N eur implij 'vit he skigna lokans ha miraklou.

-IX-


Renta reas ar vuhez d'eun den yaouank lazet  
 Gant he vreur en eur c'hoari, siouaz heb evested.  
 Ar zant reas da Zoue eur beden evitan  
 Ha kerkent an den yaouank zeuas buhez ennan.

-X-

He fervor, he zantelez hag he holl vertuziou  
 A glaske kuzet d'an holl kouls hag he viraklou;  
 Setu perak 'n em dennañ 'neun doare ermitaj  
 Evit 'n em rei da Zoue a gare heb partaj.

-XI-

Al lec'h en devoa choazet ar zant evit en em guzet  
 Voa eul lann hir ha ledan neubeud darenpreded.  
 Eno dindan an domder kouls hag ar ienijen  
 E tremene noz ha de e peb seurt pinijen.



-XII-

Mes evel he viraklou hen diskulihas bepret,  
Euz a bevar c'horn ar vro e teuas d'he gacuet  
Kalz tud klanv gwall gasset gant bep seur klenvejou;  
Holl e kavent at yec' hed dre nerz he bedennou.

-XIII-

Krena ra c'hoaz Sant Vaude dre ma vrassa he vrud  
Hag e treus eur voagen-vor 'vit pellat ouz an dud;  
Kaout a ra eun enezen en eul lec'h danjerus  
Karget holl a serpentéed ha kellien bilimis.

-XIV-

Ar zant ha na glask hepken 'met he zilvidigez,  
A veve kouls lavaret hep tam magadurez;  
Ober a rea ermitaj e kreiz an enezen,  
En despet d'ar serpentéed, en despet d'ar c'hellien.

-XV-

Neb a laka he fizians er Broividans divin  
A gerz war ar serpentéed dizaoun ha dijagrin;  
Sant Vaude 'n ermitaj a veve dizoursi  
Gant he zaou ziskibl fidel Botmael he Tudy.

-XVI-

Doue 'vit rekompansi feiz he zervicher mad,  
A reaz d'ar serpentéed ha d'ar c'hellien kuitaat;  
Ha douar an enezen gantan santelezet  
En deveus a c'houdevez eur vertus kaer meurbéd.

-XVII-

Da enezen sant Vaude c'houdevez e teuer,  
Euz he douar burzudus da veur l'ec'h e kasser;  
Kals a dud eux hon amzer testou a gement-ze  
Pareet euz he c'henved gant douar sant Vaude.

-XVIII-

Dreist-holl ar vugaligou zo sempl ha goan ganet  
E kals a andrevajou a ve d'ezan gwestlet.  
Ha Doue a ro yec' hed d'ar vugaligou-ze  
Pa doucher outo douar euz enez sant Vaude. (I)

-XIX-

Ama e parrez Lannedern hor beus he japel  
Trugarez d'hon tadou koz o deus graet e zevel  
Savet eo da zant Vaude evit e enori  
Deut età , breudeur kristen d a galon d'her pedi.

-XX-

Beza 'n euz dirak Doue ar memes galloud c'hoaz  
Da barat ar c'henvejou, d'ober miraklou bras;  
Mes goulenomp da genta a greiz hor c'halonou  
Ar c'hras da garout ar Zant, da heuilh he vertuziou.

-XXI-

Klaskomp evel ar Zant-ma heuilh bolontez Doue  
Ha kuzet hor vertuziou dre an humilité;  
Tec'homp euz an danjeriou ha pedomp anezan  
Dreist peb tra war hor maro da zont d'hon assista.

(I)

Eno e varvas ar Zant a vertuziou karget  
He gorf gant he zaou ziskibl voa eno sebeliet  
Meur a lec'h zo bet kasset darn eus he relegou  
Ha savet en he hano eleiz chañeliou.

